

# Gwerz ar brezel

Dizano. Bet embannet e 1916.

Modernnaet eo bet an doare-skriva

## Taolenn

Gwerz ar brezel

Diviz etre re ar gêr hag ar re lazet

D'an oll Vretoned

# Gwerz ar brezel

QuickTime™ et un  
décompresseur  
sont requis pour visionner cette image.

Kalz ne hourent ket anzav Jezuz evid roue :  
Plijaduriou hag arhant, ne glaskent nemed se ;  
Med setu mouez ar hleier da harm en o zoursiou  
Hag ar hanol da strakal... Spontet an oll vroïou !

Euzusañ traou a welom war dachenn ar brezel ;  
Dre oll 'leiz a dud lahet, 'leiz a dud o vervel !  
Ha 'barz an tiez goullo nag a daerou skuillet  
Gand re ar gêr o hortoz neb na zistroïo ket.

Kouezet 'n eur divenn o bro, on zoudarded dispont  
Da glemm truezuz o zud euz a-bell a respont,  
D'o hoar, d'o mamm, d'o fried ha d'o bugaligou...  
Dim oll 'ray vad o hleved. Selaouom o kozmou.

# Diviz etre re ar gêr hag ar re lazet

QuickTime™ et un  
décompresseur  
sont requis pour visionner cette image.

QuickTime™ et un  
décompresseur  
sont requis pour visionner cette image.

## Ar hoar

Eur breur en-devoa Doue roet din da gared,  
Gand an Alamaned kriz emañ bet diskaret ;  
Ha me ne oan ket eno evid stankañ e wad,  
Pe, goude ‘oe tremenet, serri e zaoulagad.

QuickTime™ et un  
décompresseur  
sont requis pour visionner cette image.

## Ar breur

‘Eneb d’ on adversourien digredenn ha diroll

N'em-esu ket kemeret poan ha stourmet en argoll ;  
Ma gwad evel-se skuillet 'n-eus miret, c'hoarig kêz  
Deoh hoh enor hag ho ti, heh iliz d'on farrez.

#### An emzivadad

Lahet 'deus dim on tad ker ! Truezuz eo on stad !  
N'he-deus ket on mamm glaharet ken nerz da labourad !  
Piou outi a dostao bremañ d'he honforti ?  
Piou a vago ahanom ? Piou a zalho an ti ?

#### O zad

Deoh-c'hwi, o ! ma bugale, pan eo kollet ho tad,  
Deoh eo sehañ d'ho mamm ger daerou he daoulagad ;  
'N em stardet en-dro dezi, leun a fiziañs ha kreñv...  
Me 'bedo 'vidoh on Tad, an hini<sup>1</sup> 'zo en Neñv.

#### An intañvez

'Baoe an deiz 'oam eureujet, pegen mad 'oa 'vidon !  
'N em zouten a raem on-daou, ne raem 'med eur galon !  
Prim eo deut an disparti, setu-me ma-unan,  
Heb eur bez da vond warnañ, me hag on re vihan !

#### He fried

On harantez 'oa gwirion, ho klahar a zo braz !  
Med war-lerh on mestr Jezuz c'hwi a zougo ho kroaz !  
C'hwi 'zavo on bugale hervez lezenn Doue ;  
Hag en gloar ar Baradoz ni 'n em gavo gante.

#### Ar vamm

Gwir eo 'ta, p'hen luskellen, bihan, en e gavell,  
E oa da rei da lahañ e vagen ma bugel !  
Kaled eo ma flanedenn : N'ouian ken 'med gouelañ !  
Me 'garje bezañ gallet rei ma buhez 'vitañ.

#### He mab

Beteg Mamm Jezuz, pignet, ma mamm, war ar Halvar ;  
Ganti hepken ho-pezo dizamm en ho klahar :  
'Vel 'n-esu he Mab on frenet er groaz dre e varo,  
Ho mab-c'hwi, en eur vervel, 'ziskour daspren ar vro.

#### Tud ar barrez

Nag a baotred, sul ha gouel, a gane 'n on iliz !  
Ped oute ; o ! ma Doue, a deuio war o hiz ?  
En-dro dim e kresk bemdez ar re a zoug kañvou ;  
E pevar horn ar barrez e klever hirvoudou !

#### Ar zoudarded lazet

Ober kañvou 'zo dleet : on Zalver a ouelas  
Gand Madalen ha Marta war o breur pa varvas...  
Bremañ pedet evidom ha roet aluzenn  
'Vid ma vo er Purgator berroh on finikenn.

#### Oll gristenien ar vro

Penaoz mired gras Doue ha kerzed 'n e lezenn

---

<sup>1</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

Anez ar zakramantchou, anez ar veleien ?  
Kalz aneze 'zo 'kreiz an tan, kalz a goll o buhez,  
Ha ni 'chomo hep pastor evel tud divadez !

#### Ar veleien

Ni 'oa karget d'ho kelenn ha d'ho ren er brezel  
A voug eneoù a-vern dre ar pehed marvel ;  
Pedet Jezuz ha Mari, hag euz ho pugale  
Dibabet ar re furrañ, gret beleien neve'.

# D'AN OLL VRETONED

*War don ar poziou kenta.*

Dindan heveleb gwalenn, aheurtet na chomom !  
A-vremañ, o ! ma Jezuz, c'hwi 'vo roue warnom.  
Brezel, eta, d'ar pehed, da beb eur, e peb leh,  
Ha d'on bro ger, hebdale, Doeu da roy an treh !

Evel-se bezet greet !